

Da Genver Gouel-Yann « Spered an Tan »

— 1 —

Ene beo an tan
 Eo gwir melezour eun ene ' garan, —
 Med evid piou e verv ar skodenn
 A zo dindan ?
 Ouz piou ra goap gand ar vogedenn
 Ene beo an tan ?

— 2 —

Lagad don an tan
 'Vel eur goulou-noz breman ne ra van, —
 Med petra lavar sin ar hlacuenn
 A zo dindan ?
 Va halon a lamenn dirag pedenn
 Lagad don an tan.

— 3 —

Ludu skanv an tan
 A nijo war askell an avel hlan, —
 Med m' glask an diweza elfenn
 A jom dindan.
 Alla ! Maro war eul luhadenn
 Ludu skanv an tan !

Ebrel 1952
 Per Jakez HELIAS

Sonerez gand Polig MONJARRET, savet evid Gouel Sant-Yann, mezeven 1948.

Klevet e vo « SPERED AN TAN » e-doug Abadenn Vrezoneg ar zul 20 a viz mezeven, kanet gand Chanig AR GALL, eilet war an delenn gand Andreo MAHOUX.

(Kaset gand « Emgleo Breiz »)

E - ne beo an tan Eo gwir[↑] me-_{le-}le-zour eun e²-ne ga-ran E
 ran Med e - vid[↑] e verv[↑] ar sko-denn. A- zo din-dan Ouz
 piou ra[↑] goap_{gand} ar vo-ge - denn E - ne bec an tan?